

A N N E E S D E C H E M I N E M E N T S

14 - An intañvez paour - La pauvre veuve

Hélène PARC, Ploure (Plouray) 27.07.1979

'Barh an Hen - bont zo un i - liz
A zo an' - ve'et ar ba - ra - douez.

'Barh an Henbont zo un iliz
A zo an've'et ar baradouez.

Ar baradouez ema an've'et,
Hag he ano he deus meritet.

Un intañvez e oe 'barh kêr,
A yê da bedo d'ar chapel ;

Hi a bede hag a ouele
'R Werc'hez Vari 'n hi selaoue :

"Na ma fried am eus kollet,
.....

Lan e' ma zi a vugale
Ha 'm eus ket boued da rey dehe.

Ret 'o din laho 'n hani koshañ,
'Vit soulajo ar yaouankañ.

- Intañvezig paour, na lahet ket,
Kerhet d'ar ger, c'hwi 'gavey boued,

C'hwi 'gavey 'ar ho tól bara poehet,
'Barh 'n ho parkoù segal hañvet,

'Barh 'n ho parkoù segal hañvet,
Hani ar re all 'divleunia ket."

A Hennebont il est une église
Que l'on appelle le paradis.

Elle est appelée le paradis,
Et son nom, elle l'a mérité.

En ville, il était une veuve
Qui allait prier dans la chapelle ;

Elle priait et pleurait,
La Vierge Marie l'écoutait :

"J'ai perdu mon mari,
.....

Ma maison est pleine d'enfants
Et je n'ai rien à leur donner.

Il faudra que je tue l'aîné
Pour soulager le plus jeune.

- Pauvre veuve, ne (le) tuez pas,
Rentrez chez vous, vous trouverez de la nourriture,

Vous trouverez sur votre table du pain cuit,
Et dans vos champs, du seigle bien mûr,

Dans vos champs, du seigle bien mûr,
Celui des autres ne fleurit toujours pas."